

74

Ar marc'hadour.

(f° 106)

Eur marhadour iaouant quinidik a rouan  
a zo deud ar bla man da foar kal ar gouan.

he prena ha gwersa ober profit he di  
Kenta ma c'houlen loja voa en n' hostaliri

hostis hag hostizez a c'houi a c'heus gwin mad  
Da rei dar mar[c]hadour var e c'henta donad.

Ja da marhadour diskenit deud en ti  
ha leke tu ho marc'h ebars ar merchossi  
Bremaik pa deui ar paot e hiel d'he kundui.

Laouik ar bon garçon pignet doc'h an ec'h  
Cherwichot e vrot deus ar sort a fel deoc'h.

Laouik ar bon garçon a voa eufn den vaillant  
A sone oc'h an daol gant eur chiffrer arc'hant.

ar vatezik vien he hober ar goële  
hag a selle outan hag a c'huanade

Margodik materzik na dime leverit  
Na petra ma sellit na ma c'huanadit.

(f° 107)

— Na sellit tu arze a dindan ar goële  
e vellot daou korf all c'houi vezo da trede  
a ber an anter nos e vezo ar pevare.

Margodik materzik rekour din va buhe  
A me a krei mestres var pem kant skoet leve.

Me a meus no breur all er servich ar roue  
hag a zo ken dispos a ker vaillant a me.  
Margodik materzik ar choas ho fio a n'he.

Laouik ar bon garçon na dime l'évirit  
na c'houi o c'heus konnaissans gant plac'h iouank hebed

Margodik materjik ho trompla ne rin ket  
herio zo teir sizun e roan me eureujet.

Laouik ar bon garçon diviskit ho boutou  
Kersit var ho leroù  
e man ho march e mes hag ho pistoleniou.

(f. 108)

Mes o marc'hant siwas zo dindan an alchoëchou  
an eb a velche an hostises ho vond doc'h an eac'h  
ar goulou en he dorn ar gontel var he brec'h

Dentelez var he dorn dentelez var he dal  
Arc'hant ar marc'hadour zo ganti e vragal.

7

Moris Follezour labourer, Taole 2 Janv: 1851 -